

Kazetenner on diouzh va micher ha gouzout a-walc'h a ran ne chomin ket bev pell ken. Aes e vo dezho va drouklazhañ. Dre lakaat danvez skinoberius e-barzh va c'harr-tan da skouer evit ma pakfen ur c'hrign-bev. Pe dre lakaat dram e-barzh va ranndi e New York evit ma vefen toullbac'het evit peurrest va buhez. Pe dre lazhañ ac'hanon war un dachenn didud hag embann da c'houde em boa graet va fri-furch e-barzh aferioù lous ar Mafia...

Bez'e c'hellfent paeañ ac'hanon ivez evit serriñ va beg, reiñ din kalz arc'hant ha kas ac'hanon war un enezenn bell er Mor Habask e-mesk ur bagad mondianed lart ha disorb...

Met sed amañ an dalc'h : c'hoant am eus da sevel va mouezh. Divizet em eus enrollañ va zesteni hag e gas d'an « New York Times ». Evit ma vefent holl tapet dindan ur barrad aon ruz. Evit ma vefe c'hwen en o loeroù. Evit ma kouezhfent an eil war-lerc'h egile. Ya, an holl re-se a zo kiriek eus an drajienn kriz-se.

Se e vefe va zestamant a-raok kuitaat an douar-mañ...

Atav em eus bet stourmet evit gouzout ar wirionez. Un tammig eeunik eo, neketa ? Kreñv eo galloud ar gelaouennerien er vro-mañ. Hag abalamour da-se ez omp deuet fall d'ar galloud kreiz. Gwardourien an demokratiezh ez omp en un doare. Hag emañ hor bro, me'm eus aon, o tont da vezañ tamm ha tamm un diktatouriezh. Tapet ma vez etre krabanou an arc'hantourien hag an integristed a-bep-seurt...

Ya, ne c'hellan ket derc'hel em spered ar pezh a ouzon. Met gouzout ervat a ran e ouzont... Ha dav eo din kuzhat. Abaoe miz e kuzhan. Atav o ruilhal war an hentoù-tizh. O treuziñ nouspet stad. Kousket a ran e-barzh motelioù marc'hadmat. N'ouzon dare pegement e chom war va c'hont-vank. Ne ra forzh. Keit ha ma c'hellan padout.

Gourvezet on war va gwele. Treiñ a ra dizehan an avelerez. War an daolig-noz ez eus ur bibl. Diwar va gwele e c'hellan sellout pizh ouzh an diavaez... E ken kaz...

Gwalc'het em eus va dilhad e-barzh ar gibell. Troc'het em eus va barv. Er vro-mañ ne vez ket prizet ar glaskerien-bara. Tud nul, ha c'hoazh. .

Ur wech e oan aet da doullañ kaoz gant ur c'houblad kozhidi o doa graet o annez er C'holorado, e-barzh traonienn ar "Baca"¹ ma veve

un toullad brav a villiarderien all. Bet e oant oc'h ober un tamm bale er Meksik. Eno o doa gwelet bugale druilhennec oc'h ober an aluzenn.

"Didalvez eo an dud-se !" Setu pezh o doa diskleriet. Norvejianed a orin e oant. Deuet e oant e Kolorado hep ur gwenneg toull dindan o anv. Difraostet o doa bet koadoù gant o daouarn. Savet o doa bet un davarn gant o daouarn. Ha tamm- ha-tamm e oant deuet a-benn da rastellat arc'hant evel ober glav. Tud vrudet a oa deuet da vakañsiñ en o zavarn. Ha bremañ ez int perc'henn war peder stasion-ski. Diwidre e oa o soñj. Degemer miziadoù an dilabour a dalvez kement ha bezañ didalvez.

"Ret eo dit gounit da damm kreun diwar c'hwez da dal" Setu pezh a lavar al levr du a zo war an daolig-noz. Ha diwar lenn al levr-se e tennont o c'hredennoù. Na mui na tost. Pep unan a c'hell en em zibab er vro-mañ. Pep unan, pegeñ dister e vefe, a c'hell kaout ar "podad aour"². Setu'ta diazezou ar gevidigezh er vro-mañ...

Mont a ran un tammig pell marteze. Bez'ez eus tud evel don hag a gred er vadelezh, er garantez evit o nesañ. Bez'e c'heller bezañ nul. Gwelloc'h goulenn an aluzen eget sunañ an nesañ... Va Doue benniget ! Ma lakfen-me an diviz-mañ war ar paper e vefen gwelet evel ur c'homunour brein. Peadra da spontañ mik ar virourien a vez o ren aferioù ar gouarnamant...

Dirak ar motel e oa ur stasion-esañs. Tardañ a reas ur c'harr-tan polis. Diouzhtu e kuzhas Jack Laggan. Tennañ a reas ar rideoz ha mont e-barzh ar sal-dour. Touforus e oa an aer. O talmiñ e oa e galon en e vruched evel ur morzhol o skeiñ ouzh un annev. Treiñ ha treiñ a rae an avelerez. Diouzh prenestr bihan ar sal gibellañ e c'helle sellout pizh outo. Daou veg o zok doare Texas, un tammig gobius anezho. Deuet e oant da evañ ur banne... sañset. A-benn ur frapadig e welas anezho o tont er-maez. O toullañ kaoz edont gant paotr ar stasion. Diwar-benn petra avat ?

Dav e oa dezhañ bevañ e-mod-se bremañ, krignet gant an aon. Pep hini a oa deuet da vezañ un dañjer evitañ.

Mont a rejont kuit en ur lakaat o fneuiou da wigourat.

Mont a reas da c'hourvez war e wele. Evañ a reas ul lom whiskey. An hini a blijje ar muiañ dezhañ e oa an "Old Virginia". Gantañ e veze atav e walkman. Selaou a reas un ton kozh eus New Orleans.

Pa voe tremenet e varrad aon, e lakas e sonenroller da dreiñ. Evit an nouspetvet gwech e selaouas an testeniou en doa enrollet diwar-benn an "afer".

¹ Ar Baca : ur gompezenn lec'hiet e kreisteiz Kolorado

² « the golden pot » : kalz tud a yae gwechall da Amerika evit ober brazadenn

N'em boa ket kalz amzer da bakañ va feadra. Kustum e oan kouskoulde da vevañ evel-se a-dizh-foeltr. N'em boa ket c'hoant da gemer ar c'harr-nij : klañv e vezan atav ennañ. Gwelloc'h e oa din kemer va c'hombi Volkswagen. Da nebeutañ e c'hellfen espern un nebeud gwenneien.

War-lerc'h ur pennad brav a veaj en em gavis e Stad-Texas ma oa erru ur maread repuidi. E-barzh ur sportva toet e oant bet lakaet. Roet e oa bet dezho gweleoù pleg gant an arme hag ar c'hevredigezhioù a garitez evel hini Arme ar Salud a glaske sikour anezho diouzh o gwellañ. Milierou a dud a oa bodet eno. Bugale o c'hoari e-mesk ar renkadennou gweleou. Tud deuet, un tammig abafet goude kement a boan, a freuz hag a reuz. Tud o doa kollet o ziez, labour, tud o doa kollet ster o buhez ha na ouient ket re petra a vefe o dazont.

C'hoant am boa da doullañ kaoz gant rummadou tud disheñvel evit bezañ an tostañ d'ar wirionez. Rak sed amañ an dalc'h : penaos displegañ e oa bet aozet ar sikourioù ken gorrek e pinvidikañ bro ar bed ?

Ur fed all a drubuilhe kalzik tud abaoe ma oa c'hoarvezet ar gwallreuz-se : bez'e oa ur baourantez kriz o ren er vro-mañ. Hag ar beorien a oa diouto morianed dreist holl...

Ober a ris anaoudegezh gant ur c'hozhiad anvet Douglas Junior Mac Arthur. Un den a vent etre. Kigennet mat, dezhañ blev frizet gwenn-kann. Komz a rae gouestad gouestadik evel ma ra tud ar c'hreistez. Ur yezh lipet-brav gantañ avat. Ne voe ket diaes din lakaat anezhañ da zistripañ e soñjoù. Chaokat a rae e c'henou e-giz ma vez lavaret e New York. Evel pa vije o tañva ar gerioù o-unan en e forn.

- Me a zo chomet bev ! Ra vezo benniget an aotrou Doue hag e aeled. Kozh-douar on met atav emañ !

C'hoarzhin a reas a-bouez penn.

- Laosket'm eus va loch ha va c'hi war va lerc'h ! Kollet em eus va amezeien, lod anezho boued kroug. Bremañ e rankan kregiñ gant ur vuhez nevez rak yac'h-pesk on c'hoazh ! Morse ne'm eus bet gwelet ur medisin. . . N'eus forzh penaos ne'm befe ket arc'hant a-walc'h evit e baeañ !...

- Penaos eo c'hoarvezet an traoù, mabig ?

Skrabañ a reas e benn.

- Penaos eo deuet an avel-dro milliget-se warnomp-ni : evel ur barrad kirvi-raden pilet war ur parkad ed azv ! Se e oa youl hor C'hrouer, m'en tou !... Met perak en deus skoet ganeomp-ni, paour-du hor revr ! Ya, ganeomp-ni, ken du da lazhañ ! N'on ket evit intent an dra-se... Rak en tu all d'ar pont eo chomet an tiez, tiez ar juloded...

Cheñch a reas e vouezh souden. Dont a reas da vezañ donoc'h evel pa vije bet o kontañ ur vojenn. Terzhienn a oa en e zaoulagad ha gant forzhig jestroù e tisplegas an darvoudoù...

- C'hwezhet en doa an avel kement na c'helled ket chom war-sav. Kouezhet'oa an dour-beuz, deuet da flastrañ er straedoù ha skubet en doa pep tra war e hent : loened kenkoulz ha tud, kirri-tan, toennoù, gwez evel pa vije erru deiz ar barn diwezhañ. Ha da c'houde, ar c'halm-chok. Korfoù marv koeñvet o vont da-heul an dour a-gleiz hag a-zehou. Un nebeud devezhioù goude, ur c'hwezh-flaer a save diwarno. Na bus na tren evit kas ac'hanomp pell diouzh an ifern yen-se. Re start ma oa deomp chom eno e tivizjomp mont kuit war vale. War-zu an hent-tizh lec'hiet war an uhel hag a liamm hor c'harter deomp-ni ouzh "Gretna", hini ar baotred o lostoù lart. Setu'ta milieroù ha milieroù a dud o vale, merc'hed, bugale, gwazed en o feur ha kozhidi o treuziñ ar pont. 'Vel pobl ar Juvezien bet kaset gant Moizez dre ar gouelec'h evit kavout an douar prometet... Pa voemp erru e-tal ar pont e voe gwelet polised armet mat ouzh hor gortoz. Ha setu int-holl o tennañ er vann. Pav, pav ! Boledoù a-fuilh... C'hwen a oa hol loeroù. Pebezh disurz !... Ha ni da redek, da ziskampañ d'an daoulamm ruz. Lod a gouezhe. Unan gozh a varvas war ar prim diwar un atak pouloud³. Distroet d'hor poull brein...

- Ha da c'houde ? ha da c'houde...

- Berr gant an dour hag ar boued. Digor bras hor c'halon ha ne oa griñsenn ebet da zebriñ en ti... 'Blam da-se e oa bet peilhet stalioù, mabig. Ar re a skrapas traoù ne oa ket diouto laeron. M'hen tou dit, mabig. Nann, feiz vat ! Tud ordinal e oant evel don pe evel dout. Du-pod gant an naon hag aet itik !... Met ne badas ket pell ar jeu ganto... Deuet e oant en-dro, int-i !, an archerien. E bourzh zodiaked e oant hag a oa o vont a-dizh-foeltr en taol-mañ. Ha, pav !, pav ! O tennañ warno... Aon a savas gant an dud. Sparlet e oa warno. Ha setu an amzer oc'h ober e dro. Kalz diwezhatoc'h ez erruas ar sikourioù. Kalz re ziwezhat siwazh ! Kalz diouzhomp a reas o zalaroù sioulik en o ziez diwar an naon, ar sec'hed met dreist holl diwar ar spont... N'omp ket perc'henn war ar bed-mañ, mabig. N'em eus ket keuz avat. Heuliañ a ran va flanedenn...

³ « un taol-gwad : doare Gwitalmeze.

n'eo ket gwir-bater avat... keuz'meus d'am sakso.
Unan ker am boa prenet. Te'oar, atav em eus
gounezet va zamm kreun diwar va sonerezh. Seniñ
a raen jazz e-barzh ur voest-noz eus New Orleans e
karter ar C'hallaoued... Ya, evit an douristed a ya
da dañva buhez al Louisiana. Pa sonan e-mod-se e
kav din ez on un den ha nompaz ul lazh-laou ! Ya,
pa sonan e vezan unan bennak... Petra a rin
bremañ ? N'ouzon dare ! Jentil e vez an dud amañ,
te'oar. Debriñ a ran diouzh va gwalc'h. Ya, ober a
reont war hon tro evel pa vijemp tud. Mar bez
bolontez Doue !

Tevel a reas. Dic'halloud en em santen dirak
kement a zienez. Ha ne'm boa nemet va fluenn evit
sachañ evezh va c'henvroidi war stad truezus ar
paourkeizh repuidi-se...

Pennad tri
Testeni Fiona Mac Gillivray, skiantourez

*Edon o treuziñ kompezennoù unton ar «
Middle West » . Edo an avel but o c'hwezhañ en ur
vountañ dirazañ bolotenoù plouz. Ne oa nemet ar
peulioù tredan a dorre un tammig hirvoudoù ar
vro-se...*

*Soñjal a raen er paourkaezh den am boa lezet
war va lerc'h. Petra a c'hellfe dont da vezañ ?
Tremen peurrest e vuhez e-barzh ur goudor evit an
dud diloch ?*

*A-wechoù e soñjen mont da vevañ e Europa,
ken heuget ma oan gant stad truezus hon
demokratiezh... Pe dont da vezañ un deskriver evit
va c'helaouenn. Bevañ e-lec'h ma oa chomet an
den natur ha n'eo ket troet da bleiz. . .*

*Un tizh ruz a oa gant va c'hombi, peadra da
bakañ un taol-kastiz... Edo o skeiñ war-zu Denver
m'edo "Kreizenn Studi an Hin".*

*Deuet e oan a-benn da gavout un emgav gant
ur skiantourez vrudet anvet Fiona Mac Gillivray...
Arbennigourez e oa war an avelioù-tro, hag
abalamour da-se e oa bet lesañvet an "Itron Avel-
dro". Diouti ur plac'h dichipot sañset...*

*Goude tri devezhiad beajiñ e tizhis kêrbenn ar
C'holorado. Ur gêr arnevez e oa. Pinvidik a-
walc'h. Goude gweledva unton ar Middlewest e
savas dirak va daoulagad fromet arridennad ar
"Rocky Mountains". Dre eno e oa paseet
heuliadoù hir a girri ballinet war-hent ar
C'halifornia... .*

*Er rakkêr e oa ar greizenn. Un hantergelc'h a
furme. Dirazi e oa ur pezh mell parkva. Izel a-
walc'h e oa ar savadurioù. Bez'e oa ur maread
radarioù a-bep ment ha radomoù. Eno e veze
sontet an neñv hag an douar gant satellitoù.*

*Renkañ a ris va c'harr-tan. Ober a ris un tamm
kempenn d'am dilhad. Morzet e oa va izilli
dindanon. Kemenerien a oa em zreid. Goude bezañ
digropet va daouarn ha divavet va divhar e tapis
krog en va binviji ha setu me war an hent.*

*Dindan evezh e oa ar batimanchoù-se. Dre ur
pellgomz diavaez e voe ret din lavarout piv e oan...
Ur porzhier a zeuas d'am ambroug ha da gas
ac'hanon betek burev ar skiantourez. Kempenn e oa
an trepasoù kinklet gant livadurioù ha
kizelladurioù diouzh an arz nevez. Un tammig tres
yen warno d'am meno...*

*Ouzh he burev edo ar plac'h, peg he dremm
ouzh un urzhiataer. Mont a reas en he sav. Kuilh e
oa, bihan a-walc'h. Ur pennad blev rouz dezhi ha
pikoù panez war he fas. Daoulagad wer a oa dezhi,*

speredek an tamm anezho hag o virviñ gant ur youl dibleg.

- An aotrou Laggan oc'h ? Tro vat ho peus graet ?

- Mat an traoù ganin. Kropet un tammig avat...

- Lennet em eus ho pennadoù e-barzh an New York Times. Dispar em eus kavet anezho. Emaoc'h a-du gant ar justis... Kement a liperien botoù a vez er vro-mañ hiriv an deiz, 'm meus aon. Gwelloc'h ganto kuzhat ar wirionez eget kaout trubuilhoù...

- Ya ! Abaoe afer an Twin Towers o deus cheñchet kalz a draoù er vro-mañ. Disfiz o devez an dud an eil diouzh egile. Ha dindan evezh emaoamp holl...

- Ha da gentañ ar skiantourien, me'lavar deoc'h...

- Bez'e c'hellan enrollañ ho mouezh ?...

- Grit evel ma karit. Met da gentañ, choukit ho pouez mar plij. Ur banne kafe ho po ?

- Gant plijadur !... Krogomp neuze !

Lakaat a ris va mekanik da enrollañ war-enaou...

- Hag-eñ e oac'h sourprenet gant nerzh an avel-dro "Katrina" ?

- Sourprenet ? Tamm ebet ! Arabat disoñjal ez eo bet skoet ar beg-douar-mañ gant meur a avel-dro... E 1965, da skouer, e oa bet beuzet dija karterioù ar reter e New Orleans. Dibaoe ez eus bet graet studiadennoù pizh a ziskouezas pegen bresk eo ar gêr-mañ. E 1998, goude tremen an avel-dro « Georges » e oa bet graet kalz a strivoù gant ar skiantourien. Diskouezet hor boa sklaer e vefe bet distrujet ar gêr gant un avel-dro a nerzh pevar...

- Ma !... Penaos e c'hellit-c'hwi displegañ o deus an avelioù-tro kement a nerzh ?

- Tamm-ha-tamm e vez krignet an enezennoù war bord ar mor... Tamm-ha-tamm e teu ar morlennoù da steuziañ. Neuze e tap an avelioù-tro muioc'h-mui a nerzh. Ret eo gouzout ivez emañ ar gêr hec'h-unan o sankañ tamm ha tamm asambles gant he chaoserioù...

- Ar pennoù bras a ouie ervat neuze ?

- Ya da, mil boulc'hurun ! Lavaret hor boa bet dezho e vefe distrujet kant tri-ugent kilometrad karrez eus ar gêr gant an dour-beuz. Hag etre 80 000 ha 100 000 den a vefe lazhet...

- Hag-eñ e kemeras ar gouarnamant e ziarbennoù ?

Mac Gillivray a ziskordas da c'hoarzhin glas.

- E ziarbennoù ! Finamdoue ! E ziarbennoù ? Ar c'hontrol mik a reas ! Korballet e voe ar plan evit lakaat buhez en-dro e-barzh ar morlennoù a-hed ar mor... Diskolpet e voe ar budjet evit reparañ pe sevel chaoserioù nevez, ha lezet a-gortez ar framadurioù evit derc'hel al lenn Pontchartrain...

- Penaos e c'hellit displegañ seurt emzalc'h avat ?

Komz a reas izeloc'h evel pa vije bet unan o spiañ ac'hanomp.

- Un afer a bolitikerezh eo, neketa ? Poblet eo karterioù paour New Orleans gant morianed. Ha votiñ a ra ar re-se evit an demokrated ? Abalamour da betra e vefe chalet seurt gouarnamant da fripañ arc'hant evit un toullad peorien a zo a-enep dezho ?

- N'am eus ket enrollet ar pennad-mañ !

- Bez'e c'hellit, mar fell deoc'h. Gouzout a ran a-walc'h ne chomin ket pell amañ da louediñ. Ne wriomp ket war ar memes liñsel, keta ?...

Diaes en em gavas Laggan. Hi a oa o vont da goll he labour. Kalz a dud a oa e-mod-se o koll o labour er mare-se. An holl na rannont ket mennozhioù ar pennoù bras hag a vez lakaet da zanvez sponterien... Poent e oa dezhañ skarzhañ kuit. N'en doa tra all ebet da c'houlenn diganti...

- Trugarez vras deoc'h, Fiona.

- N'eo netra, Jack. Keit ha ma c'hellan sikour ac'hanoc'h ha c'hoari an troad leue d'an toullad lakepoded-se hag a zo e penn an traoù...

- C'hwen a vo en o loeroù pa vo echu ganin va enklask...

- Spi a zo ennon ne viot ket trubuilhet ganto d'ho tro...

- Ne gredfent ket stravagañ ur c'helaouenner...

Setu pezh a greden d'ar c'houlz-se. Pebezh genaoueg !

Mont a ris er-maez. C'hoant am bije bet ober un droiad er menezioù evit spurmantiñ ar c'hoadoù kren, evit analiñ aer sklas ha boull an uhelderioù. Mont da vale va-unan-penn e-barzh an natur evel un traper kozh pell diouzh safar ha nec'hamant hor c'hevridigezh. Ya, evit spurmantiñ an avanked pe an tamiaed⁴. C'hwezhañ un tantad bras e-barzh ur frankizenn ha sellout pizh ouzh hent sant Servez. Santout ennon ar gouezder-se oc'h en em silañ em dargreiz. Bezañ dieub ha digabestr evit ur wech hepken pell diouzh bed an arc'hant hag ar c'henwerzh. Debrñ hogoù hag evañ dour boull ar frondoù. Kousket e kambr ar stered. Unan eus va mignoned en doa lavaret din ur wech e vefe dañjerus kouskoulde sevel un deltenn e-mod-se er menezioù. Leun- tenn e oa ar vein gant houarn. Pa veze arnev ha pa gouezhe an tanfoeltr e rede an tredan dre an douar. Tud difur a oa bet lazhet evel-se... Pebezh huñvre kaer en ur bed na gonte ennañ nemet pouez an arc'hant, ma rede ha direde tud evel amprevaned e-barzh ur grugell vras. Pell e oa

⁴ Tamia : ur seurt razh-koad a vez kavet e Kolorado

spered kozh an drevadennerien gent diouzh an dud... Met dav e oa din foetañ hent adarre a-benn kenderc'hel gant ar gest daonet-se... Ruilhañ ha ruilhañ war an hentou tizh didermen lusket gant trouz keflusker va c'harr-tan hep bezañ gouest da zizoleiñ kened an natur...

Pennad pevar

Testeni ar senedour William Bruce Wallace.

Dav e oa din kempouezañ an traoù evit ma vefee reizh va enklask. Betek-henn em boa bet testenioù a-enep d'ar gouarnamant. Ret e oa din diskoachañ tud bremañ a vefe a-du gantañ...

Divizout a ris mont da welout ar senedour William Bruce Wallace, ur politikour mirour eus al Louisiana hag a oa bet dilennet a-drugarez da vouezhioù ar re Wenn ha da re ar juloded du.

Pa ouezas piv e oan ne nac'has ket ma degemer. D'ar mare-se e oa drouklaouen-meurbet ar peurvuiañ eus an Amerikaned gant diefed ar politikerezh-Stad e-keñver afer an avel-dro.

Edon c'hoazh war an hent. Pebezh buhez ! Treuziñ Stadoù ar C'hansas, an Arkansas betek tizhout ar Mississippi ha mont e hini Louisiana. O kousket e-barzh va c'hombi e-pad tout ar veaj hir-se evit espern un nebeud gwenneien. O tebriñ boued kof lart e-barzh ur fast-food bennak asambles gant blenerien kamionoù pe tud o foetañ hent... Pe gant tud o tec'hout diouzh krabanou justis stad-mañ-stad. Bec'h d'am stomok bloñs⁵ ! Ret e vefe din koll pouez adarre... Ne oa nemet ar post bihan a frealze ac'hanon un tammig ! Ha c'hoazh... Klevet e veze atav toniou dister ar Far West !...

A-wechoù avat e kejen gant tud dic'hortoz... Ur wech evel-se e oa bet difoupet ur bagad "Hell Angels / Aeled an Ifern" e-barzh ur restorant. Malkennoù a dud kofek ha tatouet penn-kil-ha-troad. Chupennoù ganto, ur erer livet war o c'hein. Pa deujont e-barzh ar predva e tavas an holl. Ken didrouz all e urzhias ar baotred-se o meuzioù en un doare seven-meurbet. En ur dorodelliñ ez ejont ouzh taol ha kregiñ a rejont da chaokat o boued. Damsellout a ris ouzh unan hag hennezh a zispakas din un taol lagad. Ne gomzent nemeur. Pep unan a chome seizet en e gorn gant ar spi ne grogfe ket un tabut bennak. Pa voe echu ganto o fred ha pa voe klevet trouz kefluskerioù o Harley Davidson o straketal er-maez e voe aesaet hepdale deomp-holl...

Ur wech all em boa graet anaoudegezh gant un indian. Hennezh a oa o klask labour e-barzh ur stasion-ski er C'holorado. Un den mentet uhel ha fasok⁶ a oa anezhañ. Komz a rae saozneg gant ur pouez-mouezh spontus. Gwelloc'h e teue ar galleg mod Kebeg gantañ. Stag e oa ouzh ar remziad Cree a veve e-barzh ar Montana. Ur penn-bras hag a oa lesanvet "Soaring Eagle" "An erer o Plavañ" !

⁵ peñver : tro-lavar bro-Vigoudenn

⁶ fasok : gant un dremm bras e bro-Leon

Ti an aotrou Wallace a oa par d'an holl diez a zo dindan perc'henniezh mondianed ar c'hreisteiz. Un ti bras ha ledan dioutañ, gant kolonnenoù marmor gwenn. Pondalezioù bras a zigore war ul liorz h divent ma labourer kalz a implijidi. . . Touforus e oa an aer. Eno n'en doa ket graet an avel-dro he reuz. Planterien korzenn sukr e oa bet e hendadoù emichañs ha war-lerc'h diwezh ar brezel etre ar Sudisted hag an Nordisted e oa aet o diskennidi da bolitikourien evit difenn o interestoù...

Netra n'en doa cheñchet er Su e gwirionez... . Torret e oa bet ar sklaverezh sur a-walc'h. Torret e oa bet an dispartiach. Met se ne oa nemet ur speurenn. Rak paour-razh e oa chomet ar re zu ha dibaot niver ar re a c'helle en em zisac'hañ !

Ur porrastell a oa dirak domani ar senedour. Adarre e rankis komz e-barzh ur pellgomz diavaez. Dont a reas ur paotr gwenn d'am ambroug. Ur mastin, ur valkenn a-zen⁷ a oa hennezh gant divesker ledan outañ, par d'ur c'hi doñv kentoc'h prest da sailhañ ganeoc'h ha da skeiñ yac'h... Re ledan en e borpant strizh avat...

Heuliañ a ris anezhañ en ur deurel ur sell tro-dro din. Nag a arc'hant flutet en aner a soñjis. Dour o flistrañ pep lec'h evit magañ al leton tra ma oa tud o vervel gant ar sec'hed ruz e-barzh lastez kêr ar gêrbenn... Skalieroù marmor. Dornellou aour. Madoù e-leizh dastumet diwar c'hwezhenn paourkaezh tud o doa kiet dindan taoliou skourjez... Kalonad a savas ennon. C'hoant a zeuas ennon da flemmañ ar senedour-se daoust ma n'anavezen ket anezhañ c'hoazh, just evit diverc'hiañ va c'halon. Met ur c'hazetenner a oa diouzhin keta ? Arabat din koll an nord...

Pa'z is tre e kouezhas ar sabatur warnon, ken lorc'hus e oa an andred-se. Poltriji peg ouzh ar mogerioù. Anezho gwazed o ferukennoù poultrennet, gobius anezho. Daou vanniel kroaziet : hini ar c'hengevredad ha hini an hanternoz. Kadarioù mod re Loeiz ar Bevarzek ha me a oar-me !

Mont a reas an den en e sav diouzh tu. Stardañ a reas va dorn. Nerzh a oa ennañ, hervez. Eñ o c'hoarzhin leizh e zent evel p'en dije bet c'hoant da gas brud war ur merk toaz-dent bennak. Soñjal a ris e oa hennezh o c'hoari e-barzh ur brizhfilm bennak dre ma kinnigas din ur segalenn hag ur werennad whiskey. Nouspet gwech em boa bet gwelet an arvest-se e-barzh filmoù er post bras. Ne

nac'his ket ar banne whiskey avat daoust ma oa tomm pik-ruz er-maez.

- Aotrou Senedour...
- William, William a vez graet ac'hanon⁸. Petra eo hoc'h anv bihan ?
- Jack... Jack Laggan...
- Labourat a rit evit an 'New York Times', keta ?
- Hag en gran !
- N'he deus ket lavaret ho kelaouenn ar wirionez penn-da-benn, 'm eus aon. Pe kentoc'h, distreset he deus un tammig pezh zo erruet amañ...
- Penaos'ta ?
- C'hwi, tud an hanternoz, ho peus poan o kompren tud ar c'hreisteiz... Krediñ a ra deoc'h ez omp gouennelourien, viltañsou, amprevaned, keta ?
- Ne gredan ket ez eo an holl dud heñvel...
- Gwell a-se, Jack, gwell a-se ! Ret eo d'an nen bevañ amañ a-benn intent tro-spered an dud. Pa vez gwelet a-bell e vez distreset ar wirionez, 'gav ket deoc'h ?
- Evel-just... evel-just !. . . Met ne vez ket kavet tud pinvidik diouzh an druilh e-mesk ar vorianed. Ouzhpenn-se, ar re a zo bet skoet gant an avel-dro a zo bet morianed drier-holl...
- Gwir eo kement-se ! Gwir-bater eo ! War ar poent-se, avat... Emaon o vont da ziskuliañ deoc'h splann ar wirionez... Ha me'bari e viot feuket-mik gant ar pezh emañ o vont da zispakañ deoc'h...
- Deuet on evit klask kompren...
- Setu : ar re zu ne vezont ket tomm ouzh al labour... Disheñvel-mik ez int diouzhimp... Bevañ a reont er-maez eus red an amzer... Bevañ a reont en amzer-vremañ ha ne c'hellont ket soñjal en dazont... Ne c'hellont ket raktresañ, dav eo deoc'h intent mat an dra-se... Hag abalamour da-se en em gavont el lagenn. Pep hini a c'hell en em zibab er vro-mañ, a c'hell dastum arc'hant war-bouez e zivrec'h, gast a rochenn !... Setu pezh o deus graet an dud a orin eus Azia pe ar Juevien... Da gentañ ne oa ket druz ar maout en o zi ha bremañ e vezont o tastum arc'hant evel ober glav... Ret eo kaout un tamm ijin... Hag emañ an aour ganeoc'h war ar raden... Sed aze diazez hor broad, neketa ? N'eus plas ebet amañ evit ar feneanted ! Evel ma'z eus en Europa pe gwechall gozh e-barzh ar broiou komunour...
- Pell emañ Yann diouzh e gazeg avat, aotrou senedour. Penaos e c'hellit-c'hwi displegañ e oa bet kement a-zizurzh e-mesk ar sikourioù. . .
- Kement a zizurzh ? Lakomp e oa bet lakaet an urzh e-barzh traoù all... Emaoc'h o tisoñjal peseurt gwalleur en deus skoet hor bro-ni. Emaoc'h oc'h ankounac'haat o deus divizet un toullad sponterien dispennañ galloud blein an demokratiezh. Emañ hor c'heodediz o vevañ er

⁷ un den bras ha kreñv. Tro-lavar Mogerieg

⁸ Er Stadoù Unanet hag e Kanada e vez anvet an dud dre o c'hentanvioù

spont ha dav eo deomp gwareziñ anezho. N'hor boa ket choaz. Ret e oa deomp dispign arc'hant evit surentez hor bro. Abalamour da-se hon eus kaset soudarded en Irak. Evit frikañ galloudoù an droug...

- Pe evit lakaat an arigrap war ar petrol...

C'hoarzhin glas a reas ar senedour...

- Setu pezh'vez lavaret gant enebourien an demokratiezh...

Sellout a reas ar senedour ouzh e eurier. Aet e oa skuizh gant ar pennad-kaoz-se, anat...

- Iskuzit ac'hanon... Met un emvod am bo a-benn un eurvezh...

- Intent mat a ran... Ur blijadur eo bet din toullañ kaoz ganeoc'h...

- Kement-all din !

Sevel a reas adarre ha stardañ va dorn.

- Ha bez e c'hellfen-me ober un droiad e-barzh ho liorz ? Ken brav ma'z eo ! Sot-nay on bet atav gant ar plantenoù... Ha c'hoant am befe da aveliñ va fenn a-raok karzhañ kuit gant va oto...

- War ar charre e vezit-c'hwi dalc'hmat, kazetennerien...

- Gwir eo kement-se, 'm eus aon !

- Grit evel ma karit, Jack, degemeret mat oc'h amañ. Pa vioc'h prest da vont kuit, galvit John evit hoc'h ambroug betek ar porrastell...

Dous e oa an aer er-maez. Un tammig mouest zoken. N'en doa ket cheñchet kalz an "Old Dixie"⁹, setu pezh a soñjen. Tres ar sevenadur gall a oa war al liorz kaer-se. Delwenoù gresian. Feunteunioù dour boull...

Tremen a ris e-biou ul liorzhour du kozh a oa o kempenn ur c'hleuz. En em lakaat a ris da doullañ kaoz gantañ :

- Pegen kaer eo ho pleunioù, Aotrou ! Damant ho peus ganto, sur a-walc'h !

- Ya, dav eo din dourañ anezho alies, ken tomm eo an amzer er mare-mañ !

War e souezh e seblante bezañ ar c'hozhiad o welout un estren o komz outañ en un doare ken dizalc'h ha dizoursi.

- N'oc'h ket eus du-mañ, anat ! Eus an hanternoz ez oc'h ?

- Ya, eus New York ! Pouez-mouezh ur Yankee a zo ganin.

- Amañ ne vez ket kuskum ar re wenn da gomz ouzh ur morian evel don en ur feson ken lipr ! Ha petra oc'h deuet d'ober ken pell ?

- Kazetenner on ! N'emaon ket o vakañsiñ ! Emaon o klask sevel ur pennad-skrid diwar-benn Katrina...

Teñval e teuas da vezañ penn al liorzhour.

- Ra vo milliget ar walenn-se ! Kement a reuz he deus graet en hor bro gaezh ! En hon touez, da nebeutañ. . .

- Marteze ho pefe traou da gontañ din ?...

Sellout a reas hennezh gant esmae.

- Petra eo hoc'h anv, aotrou ?

- Jack Laggan, eus an New York Times

- Jack Laggan... Plijout a ra ho pennadoù din !

Ya, tu a vefe d'en em welet. Met n'on ket evit astenn ar gaoz pelloc'h. Va mestr ne vefe ket kontant o welout ac'hanon o tiskregiñ diouzh va labour...

Enkreziat e oa an den, hervez. Sellout a rae gant spont ouzh prenestroù an ti bras. Amzer am boa bet da skrivañ e chomlec'h ha da zibab ul lec'h evit en em welout. Mont a ris en-dro dirak toull an nor ha gervel John...

⁹ Anv ar c'hreisteiz

Stank eo niver ar gatoliked e-mesk ar re zu. Ha laouenoc'h e vez an oferennoù lidet en o ilizou. Kaniri, daouarn stlapet, dañsoù, sonerezh e-leizh, daeroù skuilhet, santimañtoù dispaket war ar prim. Me, n'on ket tomm ouzh ar relijion. Met talvezout a ra ar boan kemer perzh en unan eus o lidoù evit bezañ trelatet gant strobinnellerezh o arz.

Tamm-ha-tamm en em sile ennon ene ar vrose. Ur c'hemmesk iskis a feulster hag a zouster. Hud ar sonerezh e pep lec'h. Evel ma vije bet ar sonerezh e-unan o mouezh dezho o-unan. Strujusted ar glazur. Met kement a gasoni a verve er beg-douar-se. Ha ken berr buhez pep unan.

Dont a reas un den. Gwisket cheuc'h e oa hennezh, en e seizh gloria. Ur porpant du kaset warnañ. Ur gravatenn skoulmet tro-dro d'e c'houzoug. Ur roched wenn war e gorf. Ur re voutoù du en e dreid. O tont er maez eus an iliz edo, gwir e oa... War e heul e kerzhe al liorzhour, souchet, teuc'h e vantell.

- Sed aze an aotrou Richard Price. Hor pastor eo !

- Mont a ra mat an traou ganeoc'h ?

Komzet en doa bet al liorzhour kozh eus va c'hefridi, ha seblantout a rae ar pastor bezañ dedennet ganti.

- Na chomomp ket amañ da stranañ !

Pediñ a reas ac'hanon da goaniañ en e di. Diaes en em gaven un tammig met ne oan ket evit nac'hañ e zegemer mat...

E-barzh ur c'harter paour e oa o chom, e harzoù ar gêr. Dirapar e oa ar straed. Eus an ter du e save a-wechoù un aezhenn fetis o tont diouzh ar sanioù. Bugale e-leizh a oa gwisket evel re nouspet bannlev. Krennarded un tammig dichek o doareoù gant o c'hasketennoù bet lakaet war an tu gin. A-dreuz e sellent ouzhin rak ne oan ket stag ouzh o c'humuniez. Ma vijen bet va-unan n'ouzon dare petra a vije bet c'hoarvezet ganin. Bemdez Doue e veze muntroù. Freuzou-fregañ etre bagadou hailhoned oc'h enebañ an eil re ouzh ar re all. Evit bezañ mestr war marc'had an triakl.

Kalz a wazed a lovre¹⁰ eno. Tud dilabour eus outo. Darn diloch. Gant an dram e veze degaset buan kalz arc'hant. Hag an arc'hant-se a veze foranet buan evit prenañ ar poultr burzhudus a rae

¹⁰ lovriñ : chom hep ober netra

d'an dud disoñjal blaz c'hwerv an dienez. Pep unan en doa c'hoant da chom goudoret e-barzh e varadozig artifisiel. Ne vern dre be hent. Ha da-heul ar c'hoant marloñk-se e valee amheuliadeg ar c'hast a vizer : muntroù, emlazhoù, laeroñsi, palforsioù, inestou...

Un ti kozh a oa war anv al liorzhour. Un ti prenn, livaj diskantet warnañ. War ar pondalez e oa ur vaouez kozh en he gourvez e-barzh ur gador luskellat. Flourañ a reas an den he blev o c'hlazañ en ur antreal e-barzh an ti...

C'hwezh al louet a oa e-barzh. Kozh tapisoù dislivet. Paper moger distronk. C'hwezh pounner ar c'heginerezh. Evel pa vije bet chomet sac'het pep tra en amzer dremenet. Pezhioù arrebeuri'giz kozh. Arouezioù ur paotr yaouank kozh o vevañ gant e vamm aet kabac'h...

Pediñ a reas an den ac'hanon da azezañ en ur gador-vrec'h.

- Ur banne te ho po ?

Sellout a ris tro-dro din. Ur pezh mell kroaz a oa stag ouzh ar voger. War ur gomodenn e welis ul luc'hskeudenn a ziskoueze anezhañ gwisket e soudard. E-pad ur mare eus e vuhez e oa bet G. I. Dont a reas en-dro en ur zougen ur c'hreg o tivogediñ ha div dasenn.

- C'hoant am eus da ziskouez deoc'h ur gasetenn. . Ne vo ket hir an abadenn...

Lakaat a reas ar gasetenn e-barzh ur c'hozh magnetoskop. Savet e oa bet honnezh gant ti-kêr an New Orleans ha gouestlet da annezidi ar c'harterioù paour. Setu pezh a oa bet disklêriet enni :

“Na c'hortozit sikour ebet digant an ti-kêr ; na c'hortozit sikour ebet all digant ar Stad pe digant ar groaz ruz. Ar pep retañ evidoc'h eo tec'hout... Ha setu tout...”

Setu'ta alioù ar pennoù bras ken kaz ez erruje un avel-dro.

- Tregont mil skouerenn a zo bet graet en holl, a lavaras ar pastor. Ha morse n'int ket bet ingalet... Ma vije bet un dro-avel o tarzhañ ne vije bet na bus na tren evit kas anezho pelloc'h diouzh arroud an drajedenn. War vale e oa aet an dud skoet gant ar walenn-se. Met bez e oa polised ouzh o gortoz e penn ar pont hag anavezet eo bet peurrest an istor... Souezhet-mik e voen hag heuget ivez...

Gouestadik e tarlipen va ze. Skuizh-divi en em santen. C'hoant am boa d'ober un tamm kousk. Abaoe pell n'em boa ket kousket e-barzh ur gwir wele. Moug e oa an amzer e New Orleans ouzhpenn-se. Mouest e veze atav an aer abalamour

d'ar morennoù e-leizh a intre aergelc'h ar c'hontrese. Keuz am boa da hin va New York genidik. Tomm-berv en hañv ha yen-sklas er goañv. C'hwezh ar stouv¹¹ a lakae ac'hanon da sorañ tamm- ha- tamm. Dihunet e voen avat a-daol-trumm gant mouezh ar paotr.

- Antronoz e vo unan eus o emvodoù... Mar fell deoc'h mont di ho po danvez da lakaat e-barzh ho kelaouenn...

- Emvod piv'ta ?

- Emvod ar C'hu-klux-Klan. Divorfil e vezont er mare-mañ...

- Oberiant e vezont atav'ta neuze ?

- Ken oberiant ha biskoazh... Lakaomp e reont o gwalldroioù en un doare kuzhetoc'h... pep tra er vro-mañ a zo dindan o c'hrabanou... Met kavet o deus tu d'o ober en un doare soutiloc'h. Dre blasañ tud e kargoù uhel da skouer... hag e dereziou uhelañ ar gevidigezh...

Chom a ris ur pennad abafet. C'hoant bras am boa da ober ur goulenn a darode din va zeod.

- Met piv oc'h-c'hwi a-benn ar fin evit gouzout kement a draoù ?

- Me a zo ezel eus ur gevredigezh a geodedourien a glask lakaat un tamm kevatalted etre an dud. Tud peoc'hus omp diwar patrom Martin Luther King. N'omp ket galloudus siwazh ! Ma vefe diwentet o drougoberioù e c'hellfent bezañ paket berr. Sed aze ho labour, neketa, aotrou ?

- Ober a rin va seizh gwellañ posupl...

- Gouzout a ran pelec'h'vo o emvod. Bez'e vo maread a dud. Dav e vo deomp diwall rak gwarded armet a vo postet un tammig pep lec'h...

*Pennad c'hwec'h
An emvod*

Mouest e oa an noz. Lintrañ a rae an neñv gant sked ar stered. A-bep tu e veze klevet kan ar ranniged hag a-wechoù skrijadenn ul loen gouez... Gouestadik e ruilhe ar c'harr-tan war an hent ter. Moustrañ a rae an daou veajour gwellañ ma c'hallent war o aon. Hag int o-daou gleb dour teil gant ar c'hwezenn.

Edont ganti en diwezh. Tardañ a reas an oto.

- Ne c'hellomp ket mont pelloc'h... a lavaras ar pastor. Mont a reas an daou zen er-maez. Bale a rejont dre ur prad betek tizhout ur c'hleuz.

A-bell e c'helled gwelout ur pezh mell tantad o stinkañ puilh fulennoù... .

- Dav eo din chom amañ. Ouzh ho kortoz e vin. Ma trofe an traou da fall e vo ret deoc'h en em zibab hoc'h-unan evit distreiñ e kêr...

En em silañ a reas ar c'hazetenner dindan ar c'hleuz. Jack a grogas aon ennañ da vat. Met ret e oa dezhañ mont war-raok. A-benn herr en em gavas e-mesk ur maread tud. Ar peurvuañ anezho a oa dizolo o fas. Lod all a oa mouchet o dremm gant kougoulou gwenn hag o c'horfou dezho kuzhet dindan ul liñsel wenn. E-kreiz an tantad edo ur pezh mell kroaz o teviñ.

Santout a rae Jack an trefu o virviñ en holl. A bep kostez en em gave gwarded armet gant fuzuilhou arsailh M 16. Un den en em zistagas diouzh an engroez. Unan eus ar re a oa treuzwisket. Komz a reas dre un uhelgomzer :

- Breudeur ha c'hoarezed ! Breudeur ha c'hoarezed ! Evit ar wech kentañ emañ hor c'hêr karzhet diouzh an dram hag ar feulster ! Ya !, diskarzhet eo bet kêriou New Orleans diouzh ar viltañs !

- Ya da !a c'hrozmolans an holl. Hag an holl anezho o stlakañ o daouarn.

- Pezh n'omp ket deuet a-benn d'ober a zo bet graet gant Doue !

- Ra vezo meulet an aotrou Doue ! a huchas unan.

- Ra vezo meulet hor C'hrouer !a youc'has ar beleg meur d'e dro.

- Ne vo ampouailh ebet ken da gontammañ hor buhez-ni. Aet eo kuit ar feneanted o vevañ diwar hor gweneien ; aet eo kuit an houlierien, al laeron, ar skraperien-tiez, ar wallerien.

N'ho po ket aon ken, breudeur ha c'hoarezed, rak ne zistroint ket ! Aet int kuit holl pe marvet int, a-drugarez d'an Hollc'halloudus hag en deus skubet hor bro gant an avel-dro venniget-mañ evel m'en doa skoet rouantelezh Ejipt gant ar seizh gouli !...

¹¹ pa vez chomet serret ur sal re bell ha n'eus ket tu da analiñ ken

Entanet e teue da vezañ muioc'h-mui evel pa vije bet an diaoul en e gorf...

- Treuzfurmet e vo o c'harterioù lous... Troet e vint e lennoù evit derc'hel an dourgresk evit gwareziñ hor c'harterioù deomp-ni. Savet e vo labouradegoù nevez... Dont a raio hor Stad da vezañ unan eus ar re binvidikañ... Ra vezo meulet Hor Salver evit e vadelezh !

- Ra vezo meulet Hor Salver evit e vadelezh, a lavaras an holl a-unvouezh.

Douetañs ebet !... Anavezet en doa bet Jack mouezh ar beleg-meur. Hini ar senedour William Bruce Wallace an hini e oa ! Kregiñ a reas an holl da ganañ tonioù an 'Old Dixie', tonioù ar c'hengevredad, en ur hejañ e vanniell. En alfo e oa an holl re-se...

A-daol-drumm e savas freuz. Daou ward a zeuas en ur stlejañ korf marv un den. Hini ar pastor e oa, toullet gant boledoù, gwad o tiverañ dioutañ. Spurmantiñ a reas Jack daoulagad ar senedour o lufrañ dindan an aon hag ar fulor...

- Kaset o deus bet unan eus o re evit spiañ ac'hanomp !

- Ma vo rostet e-barzh flamennoù an ifern !

Diouzhtu e oa bet taolet korf marv ar paourkaezh den e-barzh an tantad. Gwelet e voe e gorf o tisneuziañ buan betek dont da vezañ un tamm glaou. Lod a c'hoarzhe a-leiz-korf. Lod all a stlake o daouarn. Darn all a vousec'hoarzhe en un doare droch.

Kalonad a savas e Jack. C'hoant en doa da dec'hout pell diouzh al lec'h milliget-se. C'hoant en doa da sachañ e skasoù pell diouzh an holl viltañsed-se, an holl flapsovajed¹²-se krisoc'h c'hoazh eget ur bagad bleizi-broc'h.

Kejañ a reas ouzh selloù ar senedour siwazh dre ma oa bet poulzet war ar renk kentañ gant an engroez inervet mat-se. Ne glaskas ket hennezh flatrañ anezhañ. Re arvarus e vije bet marteze lazhañ ur c'helaouenner war an tach evelse-se. Met parañ a reas e sellou warnañ.

Kompren a reas Jack e vefe graet e stal dezhañ diwezhatoc'h. Gouzout a ouie bremañ en doa komprenet sklaer egile petra'oa o klask amañ...

Tamm-ha-tamm ez eas kuit an holl. Ne chome nemet ludu ha glaouennoù-bev an tantad ma oa bet losket ennañ aberzhad o follentez...

War vale e retornis e kêr. Bewech ma welen un oto e kuzhen e-barzh un douflez. A-wechoù e

recheten gant ar skuizhder hag an heug. Krenañ a raen evel pa vije bet taget gant an derzhienn. Poan am boa o sachañ war va anal ken pounner ma oa an aer. A-benn ar fin e tizhis ar rakkêr. Chañsus a-walc'h e voen evit tapout ur bus noz. Pa en em gavis e-barzh va otel ne glaskis ket tennañ va dilhad. Kemer a ris louzoù kousket hag en em astenn a ris war va gwele evit divec'hiañ va spered dre gousket hir...

¹² tro-lavar bro-Lesneven

Poan gein'm eus paket dre forzh bezañ chomet gourvezet war va gwele. Ha poan gof am bez atav dre forzh debriñ boued skorn ha lart. Kroget on da lenn romantoù polis. Un dra digustum din. Ne lennan nemet romantoù. Kousket a ran alies. An doare gwellañ da ankounac'haat. Plijout a ra din bed iskiz an hunvreoù. Bevañ a reer ur vuhez all ganto. Ur vuhez kalz estlammusoc'h eget hor paourkaezh hini. Alies e vezan ouzh ar prenestr o sellout dre ar rideozioù evel ur glapenn gozh. Sellout pizh a ran ouzh monedone ar bratiked a ya da gemer esañs. A-wechoù e vezañ direnket gant ar vatezh a zeu da cheñch va linselioù ha d'ober un tamm kempenn e-barzh ar gambr. Ne baouez ket da rebech ouzhin butuniñ kement. He fried a zo marvet diwar ur c'hriign-bev er skevent. C'hoant he defe da c'houzout pelloc'h diwar-benn va buhez. Digas e choman avat. Pe kentoc'h, digas e strivan da chom rak c'hoant am befe da doullañ kaoz ganti evit bezañ konfortet un tammig.

Hiziv ez on bet en ti-post. Lakaet em eus bet ur re lunedoù heol war beg va fri evit chom hep bezañ anavezet. An doare gwellañ da sachañ an evezh warnon marteze. Bez'e oa ul lostennad hir a dud ha ret eo bet din gortoz pell. Tud kozh a oa eno, deuet dreist-holl evit touchañ o fansion. Postet em eus ul lizher hag ur pakad. Kaset em eus ur chekenn da Zouglas Junior Mac Artur evit ma c'hellfe prenañ ur sakso nevez. Sot eo en un doare. Pazeogwir ne chomo gwenneg ebet dindan va anv. Kaset em eus ur pakad d'am c'helaouenn peogwir ez eo echu ganin va c'helskrid. Tout an traoù a zo klok bremañ... Siwazh Doue n'on ket deuet a-benn da dennañ poltriji eus abadenn-noz ar C'hu-Klux-Klan. Re zañjerus e vije bet. Enrollet em eus bet mouezh ar senedour avat. Ne vo ket tro d'ar penndolog-se d'en em zisachañ. Keñveriet e vo an daou enrolladur : an hini am boa graet e-barzh e genkiz gant an hini pa oa kuzhet dindan e dreuzwisk.

Trapet e vo ! Se a zo anat ! N'eo ket bet diverret c'hoazh e c'halloud, hogozik-sur... Met lakaet e vo e anv e ruz moarvat.

Goulo eo va buhez bremañ. Pa resevo va mignoned ar pakad e klaskint ober un dra bennak evit va saveteiñ. Dav eo din gortoz ha gortoz c'hoazh. Ret eo din abuziñ va amzer...

Gwall enkrezet ez on e gwirionez ! En ur zistreiñ d'ar motel em eus kejet ouzh ar porzhier. O komz edo gant daou zen all... P'en doa gwelet ac'hanon en doa graet sin gant e benn... N'emaon

ket o leuskel gedon¹³ ha pegen skuizh e vefen. Gwir eo ez on deuet da vezañ un tammig betek re... E pep lec'h e soñj din e vez tud o spiañ ouzhin. Gwelet e vo petra a c'hoarvezo. Prennet em eus an nor warnon. Ha prenet em eus ur gontell evit en em zifenn...

Paouez a reas Jack gant an enrolladenn. Pozañ a reas an diktafon war e wele ha sellout a reas ouzh ar solier. O treiñ e oa an avelerez dibaouez evel ur ruilhenn war un tapis gwer...

Serriñ a reas e valvennou.

- Gant ma teuint ! Gant ma teuint ! a hiboudas.

¹³ o lavarout gaou

Darempredet e veze ar restaorant-se gant bleinerien kamionou, gant beajourien gonwerzh. Ne veze nemeur a gaozioù kenetrezo. Chaokat a raent o boued, peurlipat ur banne koka kola pe gafe. Unan ha ne oa ket kafe yac'h, dour skaotañ kentoc'h. Paeañ a raent ha mont kuit.

An diduamant nemetañ e oa sellout ouzh ar post bras. Ne veze klevet nemet soroc'h ar mekanik-se e-barzh an andred digevannezus-se asamblez gant an trouz o tont eus ar gegin.

Pa zeue koulz ar c'heleier e savent o fennoù hag e parent o selloù war ar skramm...

D'an deiz-se e voe gwelet penn ar c'hinniger o tibunañ ar c'heloù. . Ur paotr du a oa, mourrou dindan e fri. Un den bras a-walc'h hag un tammig tev - ne oa ket tu lakaat ur c'holoenn en e blas¹⁴.

"Adkavet eo bet korf marv ar c'helaouenner Jack Laggan eus an New York Times en ur motel. Soñjal a ra an archerien eo en em zistrujet. Tennen en deus ur boled en e dal. Dramm a zo bet kavet e-mesk e beadra... Fallik e oa hennezh. Bet omp o toullañ kaoz gant ar senedour William Bruce Wallace hag a oa an hini diwezhañ en doa komzet gantañ."

Gwelet e voe penn ar senedour trist evel ur faouter-keuneud e-keñver an darvoud mantrus-se.

- Livet fall e oa an den-se p'em boa kejet outañ. Inervet-mat e oa e-kerzh ar pennad-kaoz en doa graet em c'henkiz. Meur a wech e voe ret deomp adkregiñ gant ar gaozeadenn evel p'en dije bet poan o chom war evezh...

Testeni ar porzhier a yae a-du gant e hini.

- Ne sortie ket nemeur. Just evit prenañ boued rak ne zebre ket e-barzh hor restaorant... pe evit prenañ sigarettennoù peogwir e vutune kalzik. Distroñket e veze dalc'hmat e zaoulagad evel pa vije o kemer ul louzoù bennak...

Adwelet e voe penn ar c'homzer.

- O sevel un enklask e oa diwar-benn efedoù an avel-dro Katrina war buhez tud Louisiana...

Mintin mat e oa ha tout an dud a oa dija war o labour e-barzh burevioù an New York Times. D'an eur-se kouskoulde ne oa nemet paotred al lastez a oa o tastum al lorgnaj er ruioù didud... pe paotredigoù yaouank oc'h ingalañ kelaouennoù e-barzh ar boestoù-lizhiri... Ya, ken abred diouzh ar beure ne veze penn kristen ebet er-maez. Tamolodet e oa ar gêr vras e-barzh he liñsel a saotradur toullet gant skleur melen rouz al lampoù-straed. Ur sourr a zassone e kalon ar geoded vor evel pa vije bet-hi ur mekanik bras o vale dalc'hmat. A-wechoù e veze klevet korn-boud ur ramoker o vont a-benn d'an Hudson Bay.

Leun-kouch e oa stasion ar c'hirri-boutin Greyhounds gant beajourien. Lod a oa o kousket harp ouzh o seier-kein tra ma oa re all o lostenniñ dirak busoù evit bezañ kaset e pep korn ar vro. Daoulagad skoelf enno ha morlivet o dremmou outo, un tammig diasur war o divhar...

Morz an noz du-pod a veze torret a-wechoù gant tousmac'h ur c'harr-nij o treiñ dreist ar gêr a-raok douarañ war aerborzh Kennedy. Gwil'hatañ a rae gouloù ruz ouzh pep hini eus e eskell.

Pelloc'h e tivorfle micherourien e-barzh marc'hallaç'h al legumaj, o kargañ pe o tiskargañ berniadoù ha berniadoù e-barzh pe diwar kamionoù souryen dindan evezh aketus marc'hadourien sinat. Bev birvidik e oa ivez ar c'hoc'hu pesked. Mouezh unton paotr an embannoù a roe an tempo d'al labour didermen.

Ken oberiant all e oa an implijidi e-barzh stal labour an New York Times. Bez'e oa tud kludet dirak skrammoù o urzhiaterioù a oa o sevel pennadoù-skrid evit ar gelaouenn vrudet-se. Un den a oa o vale e-touez renkadennou ar ruskenn divent-se. Paotr al lizhiri e oa. Pres a oa warnañ, hervez. Edo o tougen ur pakad hag o karzhañ war-zu burev ar rener. Hennezh a oa lec'hiet war an uhel. Gant tizh e pignas an gant an diri ha skeiñ ouzh an nor...

- Deuit tre !

Un den habask a oa diouzh ar rener. Morse ne golle an nord. Gwelet e veze atav war gorf e roched oc'h evañ ur voestad dour pik-pik pe o chaokat ur madig bennak. Lunedoù fetis a oa war beg e fri hag a-dreñv o gwer e verve e zaoulagad speredek.

Evel pep ezel eus ar skipailh e oa en e izelañ d'an deiz-se goude bezañ klevet keloù mantrus marv ar c'helaouenner Jack Laggan. Ur mailh e oa

¹⁴ tro-lavar Lanniliz : ken tev ken ne oa ket plas evit unan all

hennezh war e vicher d'e soñj. Un den sirius,
barrek, efedus-kenañ hag onest. Abalamour da-se
ne oa ket evit krediñ e kemere drogaj.

- Ya, pebezh gaou ! Pebezh sotoni ! Pebezh
koniri e gwirionez... Gwir eo, ur fri butun a oa
dioutañ. Nervus an tamm anezhañ. Troet a-
ziabarzh. Un den ha na felle ket dezhañ
treuzvarc'hata...

Hejal a reas e benn "Vi pe labous zo gant ar
yar..." a soñje-eñ. . .

Digeriñ a reas ar pakad. Merzout a reas ar siell
a oa war an timbroù : eus ar c'hreisteiz e teue
hennezh. Un drouksant en doe...

E-barzh e kavas enrolladurioù, rolloù-filmoù,
skridoù. Anavezout a reas diouztu skritur e gamalad
labour. E galon a reas ta-poum. Edo o lenn ul lizher
bet skrivet gant Jack evit displegañ splann
pennabeg e gelskrid...

Trumm e savas an den. Tapout a reas krog er
pellgomzer. Gervel a reas e holl skridaozerien... Ur
momedig goude en em gavas an holl re-se bodet en
e vurev. From a oa en e vouezh pa zistagas ar
c'homzoù-mañ :

- Labour a zo war ar stern, paotred ! Bezomp
divorfil. Aze ez eus ur vombezenn ganromp hag a
vo klevet er penn pellañ d'hor bro !

Neuze e krogas ar gwaskerelloù-tro da dreiñ.
Kilometrajoù ha kilometrajoù a baper moulet a rede
dindan ar ruilhoù. War ar bajenn gentañ e oa war-
wel luc'hskeudenn Jack Laggan. Hag un titl bras a
sache an evezh : "Diskuliadur ur c'helaouenner bet
muntret".